

## Pa vez ret, e vez ret... met pas dre ret !

Dernière mise à jour : 28-01-2009

E-mesk an nevez-vrezhonegerien e klever (pe e weler) implij stank an troiennoù gant ret evit ar galleg devoir, falloir. Ha gwir eo, evit ar re a zo o tiskiñ brezhoneg eo aezet ober gant ret &ndash; gallout a raer implij forzh pesort verb a vefe, kuit a zisplegañ anezhañ, kuit a gemmadur ivez kement hag ober ! &ndash; ken e vezer techet d&rsquo;ankouaat zo doareoù all. Aezet&hellip; &rsquo;fin, ret eo lâret buan : pa vez anv deus un dra bennaket en amzer dremenet en em gaver alies gant frazennoù tort un tamm, diaes ober gante, evel « ret eo bet din mont da gontañ dezhañ » (sic).

Dre vras

- Rankañ, pe rankout, an hini a vez lâret peurvuiañ evit devoir, falloir er ster "ordin&rdquo; :

Ranket am eus ober al labour ma-hunan.

Rankañ a ri lâret dezhañ.

Amañ e ranko an dud bezañ lojet.

Ranket en deus mont kuit a-raok ar fin.

- Ret na vez implijet nemet evit reiñ da gompren n&rsquo;haller ket tremen hep ober un dra, devoir absolument e galleg :

Ret e vo dit lâret dezhañ. (= ma ne rez ket e vo fall ar jeu un tu bennaket)

Ret eo bezañ barrek a-benn ober se !

Ret e oa dezhañ mont kuit a-raok ar fin. (= na pa 'n dije bet c&rsquo;hoant da chom, ne oa ket evit en ober)

- Dav a vez implijet e-lec&rsquo;h ret pa ne vez ket ken groñs ar redi.

- Dleañ, pe dleout :

&mdash; evit reiñ alioù fur, evit lâret ez eo propoc&rsquo;h, ez eo seven ober un dra

Ne zlefe ket debriñ kement abalamour d&rsquo;e yec&rsquo;hed.

Dleañ a rafes lâret dezhañ memes tra.

Dleet eo deomp sikour anezhe. (= rak int a ra kemend-all evidomp diouzh o zu ; galleg &lsquo;nous nous devons de&rsquo;)

Dleet e vefe deomp sikour anezhe. (= ma ne ve ket graet ne vo ket ken sañsubl-se ; galleg &lsquo;ça serait bien&rsquo;, &lsquo;ça serait poli&rsquo;)

&mdash; evit ur rebech, pe pa vez keuz bezañ graet pe pas bezañ graet un dra

Dleet e oa dit bezañ lâret dezhañ.

Ne oa ket dleet dezhi bezañ komzet e-giz-se ouzh he mamm.

- Arabat, evit &ldquo;il ne faut pas&rdquo; (urzh pe ali fur) ; faotañ a c&rsquo;haller klevet ivez

Arabat dezhe ankouaat prenañ an nor war o lerc&rsquo;h.

Ne faota ket leuskel se amañ.

Troiennoù all

- Devoir faire = être censé faire : bezañ da (pe bezañ sañset da)

Piv zo d&rsquo;ober ar skaotaj fenoz ?

- Devoir de l&rsquo;argent : dleañ pe mankañ

Pegement a zlean deoc&rsquo;h evit ar bannac&rsquo;h kafe ?

200 &euro; a vankont deomp.

- Devoir = probablement que (&ldquo;cela doit être&rdquo; = &ldquo;je pense que&rdquo;, &ldquo;sûrement que&rdquo;) : dleañ

Amañ e tleont bezañ lojet.

Hennezh a zle bezañ barrek a-benn ober se. Sylvain Botrel